

- 61 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 22. VA MAP SILVESTIK

Pradik

Etre /vali/ Sant Hervé ha penn parrez ann dre° °M:Tref  
 euz eunn digentil iaouank o sevel eunn arme laouenan  
 euz eunn digentil iaouank o sevel eunn arme  
 /a c'houlenn mont/  
 /me meuz eur map silvestik hag a zo eat ivez/  
 hag a ielo ive  
 n'euz tad war ann douar ker glac'haret ha me  
 Kenavo<sup>ezo</sup>/va map/ silvestik pa c'heuz bet ar vodonte  
 brema me va unan  
 ken a vezi distroet nem bezo nemet poan  
 da ouela, a zisec'ho ama gant g  
 evel ar map prodik, aotrou Doue ta Silvestik  
 ma vije bet er gear e vije  
 ma karjez choum er gear m'as kraje pinvidik  
 te poa pemp kant skoet leve e kornik prez da dad (1)  
 ouspen daou c'hant livr leve te oa eur fortun vad.  
 hardisegez am euz mont a rinn  
 Me meuz ann hardisegez da vonet d'he c'houlenn  
 na digant evit mont  
 digant tud a enor digant he gabiten  
 - Aotrou ar c'habiten, na din-me leveret :  
 ha pegement zo red  
 evit kaout Silvestik, c'houi vezo digollet.  
 pegement a zo red ?  
 Ni hon euz kalz a vadou lakit hen er valans  
 madou  
 Aotrou ar c'habiten, me roi he bouez a zevans  
 ha ne deo ket c'hoaz awalc'h kement se  
 me a roio ouspen dec'hu pouez va inkane.  
 neuze  
 ar c'habiten /pam c'hlevaz/ en deveuz lavaret :  
 ounn meurbet  
 - o klevet ho komzou me zo bras souezet.  
 C'houi fell d'ehoc'h trompla'r roue ha kaout he zoudarded  
 n'euz soudard em banden a garan evel d'han  
 me meuz eul laouenanik e kichen toull va dor  
 e kreiz etre daou venik eno e ra he c'hor

----  
 (1) Er marz war tu dehoù ar follenn e lenner ar bruzhun-  
 adoù-mañ: hep dale Silvestik - ganete dilezet - me ne vin  
 biken laouen - ken a vezi distroet - o c'hedal da zistroi  
 - a zec'ho gant - a zo eat d'ar brezel .

- 62 -

bemnoz                      bep mintin  
 dioc'h ann noz hag ar mintin ne ra nemed kana  
 me garje kaout eur galoun vije hevel out ha.  
 - te c'heuz diouaskelligou da vont dreist ar mor braz  
 kerz da gerc'hat din me kelou Silvestik c'hoaz.  
 - Debonjour dehoc'h Silvestik - ha did te hini bihan,  
 petra zo a nevez maz oud deut er vro man.  
 - Me zo digaset ama gant da dad glac'haret  
 vit kerc'hat da gelou, gout peleac'h oud choumet.  
 - disken 'ta laouenanik, disken war da zaou droad  
 me skrivo did eul lizer da gas d'ar gear d'am zad.  
 me skrivo did eul lizer evit he gas d'ezhan  
 aben daou vloaz ama m'en em gavo gant han  
 pa edon <sup>enn traougoadik</sup> em gwele kousket mad  
 me gleve ar merc'hed paour o kana soun va map.  
                                 eur plac'h iaouank  
 ha me sevel ac'hano ha komans da ouela  
                                 o va  
 /aotrou/ Doue, va map Silvestik, peleac'h emoud brema ?  
   petra rinn-me brema  
 peleac'h oud te choumet, marteze oud maro  
 a bell dreist ar mor bras pemp kant leo dioc'h da vro,  
   ar mare  
 Taolet da eskernigou da vont gant ann dour red  
 Taolet da zaouarnigou da zibri d'ar pesked  
 Pa edo he /vap Silvestik/ oc'h ober dezhan kaon  
                                 dad glac'haret  
 edo he vap Silvestik er gear oc'h he selaou  
 - Debonjour deoc'h, va zad, tavit, na ouelit ket  
   deut  
 Setu ho map Silvestik erru d'ar gear d'ho kwelet

oooooooo